

## KIS-584 – Dangor hag ergor adarre...

(GE – 05 06 98)

En notenn KIS-550, La-11, pp. 315 hh. e'm eus klasket ober an dro da hGr. *uJpokeivmenon*, La. *subjectum*, Gl. *sujet* en holl gemeradurioù en deus an hennad prederel-se gwisket e-kerz e istor. En ur lenn testennoù HEIDEGGER war an *dra*<sup>1</sup> ha war ar *wirded*<sup>2</sup> e'm eus merzhet e chome un toull e skalfad ar c'hevatalioù a'm boa kinniget.

### KEAL ARISTOTELEK AN *uJpokeivmenon*

E rann gentañ an notenn, **POELLONIEZH HA BOUDONIEZH**, e'm eus roet Br. *divoud* evel kendeç'heriad *uJpokeivmenon* dre harpañ war avatar an termen er Boelloniezh a vremañ kreizet e ster war unan eus an talvoudegezhioù aristotelek, eleze "pezh a ardaoler perzhioù dezhañ" hag o lezel a-gostez koulz lavarout ar c'hemeradur all : "pezh a lakaer dindan ensell". Evit ar c'hemeradur-mañ ned eo ket ankewer arverañ Br. *divoud* ; nemet e ve kantratoc'h, amañ war-lerc'h e welimp perak, ober gant an termen oc'h adsammañ en e luniad despizadur ar c'heal : Br. *dangor* g. -où, eleze "pezh a zo taolet, *koret dindan*". An arbennadenn en deus *dangor*- ur ster all er Vredoniezh ne zalc'h ket dirak an devoud ez eo ar ster bredoniel un dedroadur arnevez diwar ar ster aristotelek.

ARISTOTELES ne rae ket an disparti a reomp etre ur Boelloniezh o skeiñ etrezek ar c'houbarelezh pur hag ur Voudoniezh oc'h amkanañ bezañ loueroniezh rik. Ar Stagirad a arloe *uJpokeivmenon* ouzh an hinienn en un doare aet dianav dimp. Galleg hag alamaneg a dro *uJpokeivmenon* a-getep dre *sujet*, *Subjekt* ; e brezhoneg e

---

<sup>1</sup> *Die Frage nach dem Ding*, Zu Kants Lehre von den transzendentalen Grundsätzen, Max Niemeyer Verlag, Tübingen, 1987 (1<sup>re</sup> emb. 1962) [teskanvet amañ FND] ; tr. gl. REBOUL & TAMINIAUX, *Qu'est-ce qu'une chose ?*, Gallimard, 1971 [teskanvet amañ QEC]. E dibenn an notenn emañ testenn orin an arroudoù meneget.

<sup>2</sup> *Vom Wesen der Wahrheit*, Klostermann, 1997 (1<sup>re</sup> emb. 1943) [teskanvet amañ VWW] ; tr. gl. DE WAELHENS & BIEMEL, *De l'essence de la vérité*, Nauwelaerts & Vrin, 1948 (ademb. in *Questions I*, Gallimard, 1968) [teskanvet amañ DEV].

kinnigan enta ober gant *dangor*, troidigezh diarlenn ar gresianeg, o virout Br. *gouzrec'h* evit kemeradur arnevez Gl. *sujet*, Al. *Subjekt* : "hinienn unveziat evel blein an anaout" — ar blein kendave o vezañ ar *gourzhdrec'h*<sup>1</sup> hag, ent dibarek e degouezh mab den,

ar *bed ergorel*. Evel hon eus gwelet e oa kemplezh endeo steriegezh *uJpokeivmenon*, koulskoude e chome unvan ar meizad na pa'z afed dezhañ

dre al *lovgo*", an *uflh*, an *oujsiva* pe ar *pra'xi*", hag abeg a-walc'h zo eno da zerc'hel an un termen evit an holl generadurioù aristotelek.

Gant hentoù ARISTOTELES e vatee DESCARTES pa zegouezhas gant e *cogito*, strivañ a ra HEIDEGGER d'e ziskouez :

*“Evit an dodin diazez matematek<sup>2</sup> rik, ne c'hell tra ebet bezañ roet en a-raok. An erganad ne c'hell e mod ebet bezañ un erganad diforz. An erganad e unan — hag en peurgetket a rank bezañ dodet war e ziazez. Rankout a ra bezañ un erganad diazez, ar gentaenn glan ha glez. Bez' ez eus enta da gavout ur gentaenn da nep erganañ, eleze un erganad hevelep na ve ket degemeret a lec'h all pezh a ra anv anezhañ, an dangor (ar subjectum, an uJpokeivmenon). E-barzh an kez erganad andoniek e rank da gentañ an dangor e unan en e henn<sup>3</sup> bezañ deroet ha dodet. Evel se hepken ez eo an dangor ur sol tralenat (fundamentum absolutum), un azez evodet eus an erganañ en e henn hepmuiken, eus ar matematek en e henn, ur font, ur bon, ur fundamentum a zo, e kement hag absolutum, inconcussum war un dro, alese dreistarvar ha dien rik. Dre ma'z eo ar matematek emstaelet evel kentaenn da bep gouzout, e rank pep gouzout darbennet betek henn bezañ lakaet en argraf, ne vern ha difennadus e ve pe get.*

<sup>1</sup> Diziouerus eo bet savelañ keal ar *gourzhdrec'h*, erdalekoc'h eget an *ergorenn*, da heul holc'hoù prederourion evel Hans JONAS ha Jakob von UEXKÜLL (sl. KIS-540, La-11, pp. 210-241 ; KIS-552, id., pp. 328-335).

<sup>2</sup> Kredet 'm eus derc'hel amañ an amprest gresianek, rak kemeradur prederouriel ar ger, gant DESCARTES ha HEIDEGGER pergen, zo da ziforc'hiñ diouzh ar ster boas. A-du-rall ez adkavomp amañ kudenn yezhourel an adanvioù pennanvaet. Evel evit ar verboù (*bout, ar bout*), e kavan da ziskoulm eeunañ ha spletusañ e-keñver intent derc'hel digemm skrivadur an adanv, eleze : *matematek, ar matematek* (Al. *mathematisch, das Mathematische*). Ar gudenn n'eo ket nevez dimp (na direndael ! — sl. KIS-495, La-10, pp. 366-370).

<sup>3</sup> An troiennoù Br. *e kement ha henn, en e henn* a arveran amañ da bouezañ war an hennadelezh, eleze war an erdal merket d'an hennad (Al. *als solcher, Gl. en tant que tel*).

“N’eo ket peogwir ez eo skeptek ez arvar Descartes, nemet e rank mont da arvarer diwar ma tod ar matematek evel sol tralenat ha ma klask evit pep gouzout ur skor kempleg diouzh ar matematek. N’eus ket anv da gavout hepken un dezv diazez evit domani an natur, met ar bennaenn gentañ hag uc’hañ evit bout ar beziad dre vras. An kez pennaenn vatematek rik ne c’hell lezel na gouzañv araozi netra a ve rakroet dezhi. Ar pezh nemetañ a zo roet eo an erganañ dre vras en e henn, eleze an dodañ e ster an devezout oc’h erganañ. An dodañ n’en deus d’ober nemet gantañ e unan e kement ma’z eo pezh a c’haller dodañ. N’eo nemet pa emzezev an devezout ez eo eñ matematek rik [...].

“Ar c’herienn « cogito ergo sum » gwisket a-wechoù gant an erganad a sach warni an treuzintent a zo krediñ ez eus aze un dianlenad. An dro n’eo ket ha ne c’hell ket bezañ ; rak an kez dianlenad a rankje kaout da c’hourbarr : id quod cogitat, est ; da c’houvarr : cogito ; da zianvarr : ergo sum. Hogen endalc’had ar gourbarr ne vije nemet un hollekadur furmel eus ar pezh a gaver en erganad : cogito — sum. Descartes e unan a c’houverk n’eus ket ur c’hlozadur eno. Ar sum n’eo ket un dianlenad eus an devezout, bez’ ez eo en eneb ar sol, ar fundamentum anezhañ. En anien an dodañ emañ an erganañ : dodañ a ran ; un erganañ eo na zurc’ha ket etrezek ur roadenn rakwezat, ur rakroadenn, met a ro dezhañ e unan ar pezh a zo ennañ. Ennañ emañ : me a zod ; me zo henn o todañ hag o tezevout. Dibaregezh an erganañ-se eo dodañ da gentañ penn ar pezh emañ oc’h erganañ warnañ, an dangor (ar subjectum). Ar pezh a zod eo en dro-mañ ar Me ; ar Me zo dangor ar gentaenn-se kentañ holl. Ar Me zo enta ar pezh a c’hourvez splann er goueled — uJpokeivmenon, subjectum — dangor an dodañ glan ha glez. Aleno e teu ez eo ar Me a c’halver kentoc’h diwar neuze ar subjectum, an dangor. [...]

“An kez Me, gorreet en arbenn a’r matematek da renk an dangor gournaou<sup>1</sup>, ned eo, war va meno, e nep doare « dangorel » e ster ur biaouelezh<sup>1</sup> dargouezhek eus an den-mañ den. An « dangor »

<sup>1</sup> Tavantek e chom ar brezhoneg e domani an adanvioù hag an adverboù o verkañ ar par uhelañ, ar mod gwellañ holl, lakaet er-maez *mat tre, trec’h, dreist, disteñget*. Amañ a-dal da Al. *ausgezeichnet*, Gl. *insigne*, e ran gant *gournaou*.

<sup>1</sup> A-dal da Al. *Eigenschaft*, Gl. *propriété*, Sz. *propriety* n’eus e brezhoneg betek henn nemet *perzh, doare*, o tereout ouzh ar c’hemeradurioù ledan, da skouer : “*perzhioù* kimiek ar c’harbon”, a ziskouez bezañ skort evit an arverioù resis o taveiñ d’ar pezh a zo *piaouel*, a zo *piaou* (enlenat pe daveat, retvezek pe deberzhek, danvez o deus ARISTOTELES ha PORPHURIOS

evel m'en intenter en « devezout a ran », ar Me, ne stag da dalvout evel dangorelour nemet pa baouez e anien a vezañ meizet, eleze pa vez dispaket e-maez e arzoned, arzoned ma'z eus angorzhet bout<sup>2</sup>.

“Betek Descartes e talvez « dangor » kement tra o c'houstaliñ<sup>3</sup> evitañ e unan ; adalek Descartes avat e teu ar « Me » da vezañ an dangor gournaou ma tesaveler a-dal dezhañ hep mui an traoù all en o henn. Dre ma tarbenn — ent vatematek — an traoù o zraelezh da gentañ eus ar c'heñver soliañ o deus ouzh ar bennaenn uc'hañ hag ouzh an « dangor » anezhi (Me), ez int ent voniek ar pezh a emzalc'h evel allded e-keñver an dangor, ar pezh a c'hourvez a-dal dezhañ evel ergor (objectum). An traoù o unan a zeu da vezañ « ergorennoù ».

“A-geflen, e c'hoarvez ur c'hemm ster gant ar ger objectum ; betek neuze ez aroueze objectum pezh a zo taolet [« koret »] a-dal d'an derc'hañ pur : derc'hañ a ran ur menez aour. An derc'hed-se — un objectum e lavar ar Grennamzer — zo, hervez arver bremañ ar yezh, un dra bennak « dangorel » rik ; rak hervez an arver daskemmet eus ar yezh, n'eus ket « ent ergorel » eus ur « menez aour ». Hevelep eilpennadur eus ster ar gerioù subjectum hag objectum n'eo ket un afer a voazadur yezhel hepken ; ur c'hemm

---

pleustret hir warnañ). Rankout a reer enta rekouriñ da Br. *piaou* hag e zeveadoù, *piaouelezh*, *piaouenn*, h.a.

<sup>2</sup> E brezhoneg ez eo bet arveret ar bennrann *dangor*- da gentañ da aroueziñ ar Me peurbaoezet gantañ a “veizañ e anien”, eleze an hinienn goubarret diouzh an devezout betek bezañ lec'h a luskedoù hep mui, an *dangorenn*, keal bevennat, derc'hek, damgenster d'an *diemouez* freudek. Ober a reer dreist-holl gant an adanv deveret *dangorek* da zoareañ realoù gwariet dre berzh luskedoù andezvarn, andezev. Dereout a ra diforc'hiñ ervat enta keal hiron an *dangorenn* diouzh meizad an *dangor* aristotelek. Merkomp e ranker kemer diarbennoù brasoc'h c'hoazh e yezhoù all ma kaver un termen hepken, evel Gl. *sujet*, Al. *Subjekt* o kenedc'heriañ Br. *dangor*, *divoud*, *gouzrec'h*, *dangorenn*...

<sup>3</sup> Al. *bestehen*, *subsistieren*, Gl. *subsister*. Ar *goustaliñ* zo ur c'heal despizet gant DESCARTES evel “bezout e rezh solwez” (ha n'eo ket e rezh mod pe zarvoud) : “Tra a ran eus ar pezh a veizer evel o c'houstaliñ drezañ e unan hag evel dangor eus kement a veizer ennañ” (*Log. Port-R.*). KANT a ra *Subsistenz* (Br. *goustaliñ (da)*) eus keñver ar solwez ouzh an darvoud hag *Inhärenz* (Br. *enlenañ (da)*) eus keñver an darvoud ouzh ar solwez. Astennet eo bet ster an termennoù alamanek ha gallek d'ar c'heal “trebadout” ; da zec'heriañ ar c'heal-se emañ Br. *remziñ*, met moarvat e tereo ivez Br. *goustaliñ* peogwir ez eo rez d'ar meiz ne c'hell ar pezh a zo goustalus nemet trebadout.

*bondrastus eus an Dasein, eleze eus sklaeraenn bout ar beziad, war ziazez holierezh ar matematek. [...]*

*“Gant Aristoteles endeo, an erganañ, al lovgo”, a dalveze da neudenn vlein evit desavelañ ar c’hategoriennoù, eleze ar bout a’r beziad. Koulskoude, load an neudenn vlein — poell mab den, ar poell dre vras — ne veze ket despizet evel dangorelezh an dangor. Bremañ en eneb, ar poell, e kement ma’z eo an « dezevout a ran », zo gorreet a-zevri d’ar renk a bennaenn uc’hañ, evel neudenn vlein ha lez varn evit pep desaveladur eus ar bout. Ar bennaenn uc’hañ eo hini ar Me : cogito — sum. An aksiomenn diazez eo da bep gouzout, hogen ned eo ket an aksiomenn diazez nemeti dre an arbenn eeun ma’z eus empleget, e-barzh pennaenn ar Me end-eeun, ur bennaenn all, dodet a ser gant pennaenn ar Me ha dre se war un dro gant pep erganañ. O lavarout : « cogito — sum », ez erganomp ivez ar pezh a zo en dangor (Me). An erganañ a rank, en e henn, evit bezañ un erganañ, dodañ bepred ar pezh a zo en dangor. Ar pezh a zo dodet hag ezgeriet en ardaolad ne zle na ne c’hell komz war-enep d’an dangor ; ar katavfasi" a zle bepred bezañ hevelep ma hepkor an ajntivfasi", eleze al lavarout enebek, an dislavar. En erganañ e kement ma’z eo erganañ, ha da heul er bennaenn uc’hañ evel pennaenn ar Me, emañ dodet war un dro ar wiriegezh ken orinel all eus pennaenn an andislavar.*

*“Dre benn m’emañ ar matematek, e kement hag erged aksiom-atek, oc’h emzodiñ e unan evel pennaenn sturiant ar gouzout, emañ dodet an dodañ, an dezevout e kement hag « e tezevan », pennaenn ar Me. « E tezevan » a dalvez kement hag : e hepkoran an dislavar, e plegan da bennaenn an andislavar.*

*“Pennaenn ar Me ha pennaenn an andislavar a evod eus anien an dezevout end-eeun, hevelep ma ne zoug ar gwel nemet war anien an « e tezevan » ha war ar pezh a zo ennañ hag ennañ hep mui. An « e tezevan » zo ar poell, zo gwezhiañ diazez ar poell. Pezh a denner eus an « e tezevan » hepken zo tennet eus ar poell e unan ken eeun ha tra. Gavaelet evel se, ar poell zo eñ e unan ent pur, zo poell pur.*

*“[...] A-benn bremañ emañ eoriet argraf an dra er poell pur, eleze e dispakadur matematek pennaennoù ar poell pur” (FND, pp. 80-83 ; QEC pp. 113-117).*

E se emañ sklaeriet, evit neb a zo kilpennek a-walc’h da zistrec’hiñ amjestregezh yezh HEIDEGGER, an doare ma voe e ser sevenadur Kornog diempret

dezev ARISTOTELES : diouzh un tu an den hinienn, dangorenn dalc'het gredus e-maez krap ar poell<sup>1</sup>, diouzh an tu all an dra — mab den e-barzh — ez eer dezhañ dre an ergorelezh, riez ar poell pur.

### AR WIRDED, AN ERGANAD, AN DRA

Merk ar prederour eo sevel atersoù e-lec'h ma ne wel ar re all aters ebet d'ober — kavout kraf d'e veziz pezh a zo rez da veziz ar re all. E se, pa c'houlenn HEIDEGGER : “*Was ist die Wahrheit ?*”, e vanomp en amzivin. Da gentañ, hag an un aters eo hag an hini a lak an Aviel e genou Pilat : “*Petra eo ar wirionez ?*” Ar prederour, pa gomz amañ a *Wahrheit* ne sell ket ouzh mab den — nad eo *gwir* nemet o vezañ *yon* — met ouzh al lavarout, a c'hell bezañ *gwir* pe *gaou*, hag ouzh an dra, a c'hell bezañ *gwir* pe *faos*. An termen kevazas zo enta *gwarded* : “*Petra eo ar warded ?*”

*“Bez' ez eus, eme Heidegger, kalz respontoù d'an aters-se. Met un elfenn voutin zo d'an holl : a-du int holl evit ober eus ar warded ur piaou d'an erganad pe d'ar barnad. Despizañ a reer enta ar warded evel gwarded an erganad. Da skouer, emañ al lamp war enaou, ar c'hleiz zo gwenn. Ar ger « lamp » pe ar ger « kleiz » n'int na gwir na gaou drezo o unan. Pezh a zo gwir pe gaou eo an hollenn-mañ : ar c'hleiz zo gwenn, emañ al lamp war enaou. Eno, eme Heidegger, ez eus un doare da ergrafañ ar warded a zo unan eus ar meizadurioù dibaot bet arzalc'het a-hed istor ar brederouriezh, pezh nad eo ket an dienadur ez eus anezhañ ur meizadur difennadus. [...]*

*“E se e tleomp holc'hiñ lec'h ar warded ha goude, e ken kaz na ve ket an erganad, e tleimp klask arbennoù ar meizadur hengounel.*

*“[...] Dodad Heidegger eo hemañ. Pa lavaran : “ar c'hleiz zo gwenn”, e tavean, hervez termenou ar boelloniezh hengounel, ar ger “gwenn” d'ar ger “kleiz”. War un dro avat e tavean an hollenn, an erganad, d'ur pezh bennak a zo ar c'hleiz gwenn. Alese, ar boelloniezh hengounel n'he deus taolet pled nemet ouzh arvez*

---

<sup>1</sup> Ar ster-se en doa lugan ar Surrealourion : “Le subconscient vaincra”, a c'haller treiñ : “Trec'h e vo an dangorenn”, pe hini Mae 68 : “L'imagination au pouvoir” a hekleve outañ DE GAULLE : “La chienlit” — mouezhioù savlec'hiet war an eil ribl hag egile a'n isfont. Diwar vont, a-zivout HEIDEGGER, hag eñ ken spis e sell war devez ar c'hantvedoù all, merkomp ar bouc'h e voe ouzh e gantved eñ o vont betek gwelout e HITLER adunvaner Kornog.

*ardaoladel an erganad, eleze ouzh keñver an ardaolad ouzh an divoud. Hogen un arvez all ez eus, a zo sol an hini kentañ, a zo keñver gwirredel an erganad, eleze keñver an erganad en e bezh ouzh ar pezh a ra anv anezhañ*” (IPH<sup>1</sup>, pp. 19-20).

Harzet omp amañ gant ur gudenn a Yezhouriezh. Testenn c'hallek bomm diwezhañ an arroud a-zioc'h zo : “*le rapport de la proposition dans son ensemble à son objet.*” O vezañ ma ned eo ket embannet testenn alamanek notennoù Jean WAHL, e rankomp evit ar mare tremen gant an termen gallek *objet*<sup>2</sup>. Bezet pe vezet, emaoomp amañ dirak ur c'hemeradur dibarek eus Gl. *objet*. Klaskomp e zidermenañ.

Pa gomzer a-zivout un dra bennak, e reer an *divoud* eus ar pezh a gomzer anezhañ. Hogen mar klasker ober gant *divoud* er Brederouriezh ez asoupomp raktal ouzh ur skoilh. E lavar ar Boelloniezh (ha gramadegoù 'zo) e talvez *divoud* ken an ergorenn ezyezhel, an dra a gomzer anezhañ, ken an termen a arverer da gomz anezhi. N'eo ket grevus moarvat : o vezañ ma tenn ar Boelloniezh (ha gramadegoù 'zo) da emglozañ dre ezvevennañ pep dave d'ar werc'helezh ved, int tuet da ezwerc'hañ an “*touell ergeñverel*”, “*an daruniañ etre arganteul hag ergeñverenn*” (sl. KIS-343, La-08, p. 332). An devezout rik avat a rank hepkoriñ un hevelep daruniañ ha dibab. Mar dalc'her an anvad *divoud* war un termen eus an erganad e ranker reiñ un anvad all d'ar pezh a ra an erganad anv anezhañ<sup>1</sup>.

Ha Br. *ergeñverenn* dres ne spirfe ket ? Adkemeromp ar frazenn roet evel skouer gant HEIDEGGER : “*ar c'hleiz zo gwenn*”. Ne c'haller ober anv a *ergeñverenn* nemet evit an ergorenn arouezet gant ar ger *kleiz*, rezhienet KLEIZ er Yezhoniezh. E gwir, gwariañ a rafed arver an termen *ergeñverenn* mar mennfec'h e zespizañ evel penn dave un ere etre an erganad hag ar werc'helezh ved : e zespizadur nemetañ eo bezañ penn dave an ere (an ergeñver) etre an arouez hag an dra.

<sup>1</sup> Jean WAHL, *Introduction à la pensée de Heidegger*, Le Livre de Poche, 1998. Ar prederour gall, en doa heuliet kentelioù HEIDEGGER e Skol veur Freiburg e 1928 nebeut goude ma teuas *Sein und Zeit* e goulou, a aozas d'e dro er Sorbonne e 1946 diwar e notennoù ar rummad kentelioù a ya d'ober al levr-mañ. E dibenn an notenn emañ testenn orin an arroudoù meneget.

<sup>2</sup> Koulskoude mar distroomp da VWW (a voe roet an troadur kentañ anezhañ e 1930 en un displegadenn e Bremen), e stadomp ez arver HEIDEGGER *Ding, res, pra'gma* pe *Seiendes* da envel ar pezh a ra an erganad dave dezhañ (oc'h ober gant *Verhältnis* da envel an dave-se).

<sup>1</sup> Dre un abeg heñvel e ranker lezel *amkan* a-gostez evitañ da gendec'heriañ Gl. *objet*, Al. *Objekt* er c'herienn *klokaenn amkan* — houmañ oc'h aroueziañ, evel *divoud*, un elfenn lavar, na oufe enta hep mesk envel un elfenn ezlavarel.

Hag un diskoulm a ve da gavout e kostez Br. *ereulañ* ? Adlenn a ran an arroud gant DERRIDA meneget e KIS-502, La-10, p. 409 : “[...] treiñ *bedeuten* dre *ereulañ* e kement ma *venn lavarout* ur yezher « oc'h eztaoliñ » gouez da Husserl « war un dra bennak » hag, e tro ar bomm eztaolet, e kement ma *venn lavarout* [...]. An erganad, evel “bomm eztaolet e kement ma *venner lavarout*”, zo un *ereulad* hep mar ; hag *ereulenn* a c'hallfed neuze ober eus an “dra bennak” ma eztaol warnañ ar yezher ? O luniañ *ereulenn*, e lakfed da dalvout an tun arveret c'hoazh o luniañ *ergorenn* a-dal da *ergorad* — o heuliañ an diruzadenn diskuliet gant HEIDEGGER ma teu drezi an traoù da vezañ « ergorennoù ». N'eo ket hep arvar a vesk koulskoude ez intentfed an erganad e kement hag ereulad : hennezh zo un termen a Boelloniezh, hemañ unan a Anadennoniezh, eleze a'n diskiblezh a c'houl ma ve lakaet pep tra nemet ar me trehontel, ar Boelloniezh enta, etre krommelloù.

Perak neuze chom hep deverañ diwar *erganañ* e unan ? Diegi 'm be avat o kinnig *erganenn* diwar batrom *ergorenn*, bepred en askont eus ar c'hemm boniek a zo etre an diskiblezhioù, ent spis etre ar merzhout, a zo retvezek dezhañ ar Me hag an Dra, hag al lavarout ez eo Me ha Tra deberzhiek dezhañ, eleze etre an ergorad, danzead goubarel a'n dezevout, hag an erganad, korf louerele an dezevout. En ur c'heñver koulskoude e tenn an erganañ d'an ergorañ : an trehontus ez eo dezho ar werc'helezh ved. Da bouezañ war drehontusted an dra e-keñver an emouezañ e voe luniet *gourzhergor*, anvad all roet d'an ergorenn ved ; kenkoulz all, da verkañ trehontusted *objet* (hervez Jean WAHL) an erganañ e-keñver arouezioù an erganad e ve kantrat ober gant *gourzhergan*.

An arroud hon eus boulc'het diwarnañ an imbourc'h yezhourel-mañ a ve enta da dreiñ :

*“[...] keñver an erganad en e bezh ouzh e c'hourzhergan.”*

Kendalc'homp gant testenn kentel Jean WAHL :

*“[...] An erganad en deus enta un natur daouek, un daveadur daouek eo : daveadur an ardaolad d'an divoud ha daveadur an daveadur-se en e bezh d'ar gourzhergan. An daveadur kentañ, ardaoladel, a denn e gantreizh eus e geñver ouzh ar gourzhergan. E se, diouzh un tu hon eus an ardaoliñ ouzh un divoud, diouzh an tu all an dougen a ra hevelep ardaoliñ ouzh un divoud war ur gourzhergan a zo, en hon skouer, ar c'hleiz gwenn.*

*“Diforc'het hon eus enta an divoud diouzh ar gourzhergan. An ardaolad zo ardaolad ouzh an divoud, met an erganañ a zoug war*



*ur gourzhergan. Dav eo diforc'hiñ an « ouzh » o verkañ ar c'heñver etre an divoud hag an ardaolad diouzh ar « war » o verkañ keñver an erganad a-bezh ouzh ar gourzhergan.*

*“Dezastum a c'hellomp endeo, pa lavaromp : emañ lec'h ar wirmed en erganad, ez eo forc'hellek an dodad-se, rak ne ouzer ket hag emañ ar wirmed er c'hentañ pe en eil daveadur hon eus meneget : en daveadur ardaoladel pe en daveadur gwirmedel. [...]*

*“Hogen an daveadur ardaoladel a hañval bezañ dizalc'h betek ur par diouzh an daveadur gwirmedel. Hevelep arvez dizalc'h, hevelep arvez furmel a'n erganad eo a fell d'ar Boelloniezh studiañ. Ne bledor ket ouzh an devoud ez eo gwenn pe get ar c'hleiz, met ouzh furm an erganad : gwenn eo ar c'hleiz.” (IPH, pp. 22-23.)*

Diaes eo dispegañ amañ diouzh dezeverezh HEIDEGGER : evel ar chokolad eo, o tec'han un tozonadur na habaskaer nemet dre zistreiñ dezhañ. Distreiñ a raimp a dra sur. Evit ar mare e fell din chom etre ar bevennoù merket d'an notenn-mañ : un taol luc'hvanner adarre war unan e-touez skoultrekañ gwez ar mangrov prederouriel, bordilh ar c'healioù evodet eus an *uJpokeivmenon* aristotelek hag ar *subjectum-objectum* skolastek.

#### TESTENNOU ORIN AN ARROUDOU MENEGET

(HEIDEGGER, pp. 129-133 a-zioc'h)

“Für die schlechthin mathematische Grundstellung kann es keine vorgegebenen Dinge geben. Der Satz kann kein beliebiger sein. Der Satz muß selbst — und gerade er — auf seinen Grund gestellt sein. Er muß ein Grundsatz, *der* Grundsatz schlechthin sein. Es gilt daher einen solchen Grundsatz alles Setzens zu finden, d.h. einen Satz, in dem das, worüber er etwas sagt, das subiectum (*uJpokeivmenon*), nicht anderswoher nur aufgenommen wird. Das Unterliegende muß sich als ein solches in diesem ursprünglichen Satz selbst erst ergeben und gesetzt werden. Nur so ist das subiectum ein fundamentum absolutum, ein rein aus dem Satz als solchem, dem Mathematischen als solchem Gesetztes, Grundlage, Basis und als solches fundamentum absolutum zugleich inconcussum und

somit unbezweifelbar, schlechthin gewiß. Weil jetzt das Mathematische sich selbst als Prinzip alles Wissens ansetzt, muß alles bisherige Wissen notwendig in Frage gestellt werden, abgesehen davon, ob es haltbar ist oder nicht.

“Descartes zweifelt nicht, weil er ein Skeptiker ist, sondern er muß zum Zweifler werden, weil er das Mathematische als absoluten Grund ansetzt und eine ihm entsprechende Unterlage für alles Wissen sucht. Es gilt jetzt nicht nur, ein Grundgesetz zu finden für den Bereich der Natur, sondern den allerersten und obersten Grundsatz für das Sein des Seienden überhaupt. Dieser schlechthin mathematische Grundsatz kann nichts vor sich haben und dulden, was ihm vorgegeben wäre. Wenn überhaupt etwas gegeben ist, dann nur der *Satz* überhaupt als *solcher*, d.h. das Setzen, die Position, im Sinne des aussagenden Denkens. Das Setzen, der Satz, hat nur sich selbst als das, was gesetzt werden kann. Erst wo das Denken sich selbst denkt, ist es schlechthin mathematisch [...].

“Die Formel, die der Satz zuweilen hat : »cogito ergo sum«, legt das Mißverständnis nahe, als handle es sich hier um eine Schlußfolgerung. Das trifft nicht zu und kann auch nicht so sein ; denn dieser Schluß müßte als Obersatz haben : id quod cogitat, est ; als Untersatz : cogito ; als Schluß : ergo sum. Aber was im Obersatz steht, wäre nur eine formale Verallgemeinerung dessen, was in dem Satz liegt : cogito — sum. Descartes selbst betont, es läge kein Schluß vor. Das *sum* ist nicht eine Folge aus dem Denken, sondern umgekehrt der Grund dafür, das fundamentum. Im Wesen des Setzens liegt der Satz : ich setze ; das ist ein Satz, der sich nicht auf Vorgegebenes richtet, sondern nur sich selbst das gibt, was in ihm liegt. In ihm liegt : *ich* setze ; ich bin es, der setzt und denkt. Dieser Satz hat das Eigentümliche, daß er das, worüber er aussagt, das subiectum, allererst setzt. Was er setzt, das ist in diesem Fall das »Ich« ; das Ich ist das subiectum des allerersten Grundsatzes. Das Ich ist daher ein ausgezeichnetes Zugrundeliegendes — »Ipokeivmenon, subiectum — *das subiectum* des Setzens schlechthin. Daher kommt es, daß seitdem das Ich vorzugsweise als das subiectum, als »Subjekt« angesprochen wird. [...]

“Dieses auf Grund des Mathematischen zum ausgezeichneten subiectum erhobene Ich ist seinem Sinne nach ganz und gar nichts »Subjektives« von der Art einer zufälligen Eigenschaft gerade dieses besonderen Menschen. Dieses im »ich denke« ausgezeichnete »Subjekt«, das Ich, gilt erst dann als subjektivistisch, wenn sein Wesen nicht mehr begriffen, d.h. aus seiner seinsmäßigen Herkunft entfaltet wird.

“Bis zu Descartes galt als »Subjekt« jedes für sich vorhandene Ding ; jetzt aber wird das »Ich« sum ausgezeichneten Subjekt, zu demjenigen, mit

Bezug auf welches die übrigen Dinge erst als solche sich bestimmen. Weil sie — mathematisch — ihre Dingheit erst durch den begründenden Bezug zum obersten Grundsatz und dessen »Subjekt« (Ich) erhalten, sind sie wesenhaft solches, was als ein anderes in Beziehung zum »Subjekt« steht, ihm entgegenliegt als obiectum. Die Dinge selbst werden zu »Objekten«.

“Das Wort obiectum macht jetzt einen entsprechenden Bedeutungswandel durch ; denn bis dahin bezeichnete obiectum das im bloßen Sichvorstellen Entgegengeworfene : ich stelle mir einen goldenen Berg vor. Dieses so Vorgestellte — ein obiectum in der Sprache des Mittelalters — ist nach dem heutigen Sprachgebrauch etwas bloß »Subjektives« ; denn ein »goldner Berg« existiert nicht »objektiv« im Sinne des gewandelten Sprachgebrauches. Diese Umkehrung der Bedeutungen der Worte subiectum und obiectum ist keine bloße Angelegenheit des Sprachgebrauches ; es ist ein grundstürzender Wandel des Daseins, d.h. der Lichtung des Seins des Seienden, auf Grund der Herrschaft des *Mathematischen*. [...]

“Schon bei Aristoteles war die Aussage, des *lovgo*“, der Leitfaden für die Bestimmung der Kategorien, d.h. des Seins des Seienden. Indes war der Ort des Leitfadens — die menschliche Vernunft, die Vernunft überhaupt — nicht als Subjektivität des Subjekts ausgezeichnet. Jetzt aber ist die Vernunft, als das »ich denke«, eigens im obersten Grundsatz als Leitfaden und Gerichtshof aller Seinsbestimmung angesetzt. Der oberste Grundsatz ist der Ichsatz : *cogito — sum*. Er ist das Grundaxiom allen Wissens, aber er ist nicht das einzige Grundaxiom, und das einfach deshalb, weil in dem Ichsatz selbst noch ein anderer beschlossen liegt und mit diesem und somit mit jedem Satz gesetzt ist. Indem wir sagen : »*cogito — sum*«, sagen wir das aus, was im subiectum (*ego*) liegt. Die Aussage muß als solche, soll sie Aussage sein, immer das setzen, was im subiectum liegt. Das, was im Prädikat gesetzt und gesprochen ist, darf und kann nicht gegen das Subjekt sprechen ; die *katavfasi*“ muß immer so sein, daß sie die *ajvntivfasi*“ vermeidet, d.h. das Sagen im Sinne des Dagegensprechens, des Widerspruchs. Im Satz als Satz, und demgemäß im obersten Grundsatz als Ichsatz, ist gleichursprünglich der Satz wom zu vermeidenden Widerspruch (kurz : Satz vom Widerspruch) als gültig mitgesetzt.

“Indem das Mathematische als der axiomatische Entwurf sich Selbst als maßgebendes Prinzip des Wissens setzt, wird das Setzen, das Denken als »*ich denke*«, der Ichsatz, angesetzt. »*Ich denke*« heißt : ich vermeide den Widerspruch, ich folge dem Widerspruchssatz.

“Der Ichsatz und der Widerspruchssatz entspringen aus dem Wesen des Denkens selbst, so, daß bloß auf das Wesen des »*ich denke*« und das, was in ihm und nur in ihm liegt, gesehen wird. Das »*ich denke*« ist die

Vernunft, ist ihr Grundakt. Was lediglich aus dem »Ich denke« geschöpft ist, ist bloß aus der Vernunft selbst gewonnen. Die Vernunft ist, so gefaßt, rein sie selbst, ist reine Vernunft.

[...] Die Frage nach dem Ding ist jetzt in der reinen Vernunft verankert, d.h. in der mathematischen Entfaltung ihrer Grundsätze" (FND, pp. 80-83 ; QEC, pp. 113-117).

(Jean WAHL, pp. 133-134 a-zioc'h)

«Il y a, dit Heidegger, beaucoup de réponses à cette question. Mais toutes ces réponses ont un élément commun, toutes s'accordent à dire que la vérité est une propriété de la proposition ou du jugement. On définit donc la vérité comme la vérité de proposition. Par exemple, cette lampe brûle, ou cette craie est blanche. Le mot "lampe" ou le mot "craie" ne sont ni vrais ni faux par eux-mêmes. Ce qui est vrai ou faux, c'est cet ensemble : la craie est blanche, ou la lampe brûle. C'est là, dit Heidegger, une conception de la vérité qui est une des rares conceptions qui ont été maintenues dans l'histoire de la philosophie, ce qui n'est pas du tout une démonstration que cette conception soit tenable. [...]

«Nous devons donc chercher le lieu de la vérité puis, au cas où cela ne serait pas la proposition, nous devons rechercher les raisons de la conception traditionnelle.

«[...] La thèse de Heidegger est celle-ci. Quand je dis : « *la craie est blanche* », je rapporte bien, comme le dit la logique traditionnelle, le mot blanche au mot craie. Mais je rapporte en même temps le tout, la proposition, à quelque chose qui est la craie blanche. Par conséquent, la logique traditionnelle n'a fait attention qu'à l'aspect prédicatif de la proposition, c'est-à-dire au rapport du prédicat au sujet. Mais il y a un autre aspect, qui est le fondement du premier et qui est l'aspect véridatif de la proposition, c'est-à-dire la rapport de la proposition dans son ensemble à son objet" (IPH, pp. 19-20).

(Jean WAHL, p. 136 a-zioc'h)

«La proposition a donc une double nature, elle est une double relation : relation de l'attribut au sujet et relation de toute cette relation avec l'objet dont on parle. La première relation prédicative tient sa légitimité de son rapport avec ce dont on parle. Donc, d'une part nous avons le fait d'attribuer un prédicat à un sujet, et d'autre part, le fait que cette

attribution d'un prédicat à un sujet porte sur un objet qui est, dans notre exemple, la craie blanche.

“Nous avons donc distingué le sujet de la proposition et l'objet de la proposition. Le prédicat est le prédicat du sujet, mais la prédication de la proposition porte sur un objet. Il faut donc distinguer le « de » signifiant le rapport entre le sujet et le prédicat et le « sur » signifiant le rapport de toute la proposition avec l'objet.

Nous pouvons déjà conclure que quand nous disons : la vérité a son lieu dans la proposition, cette thèse est ambiguë, car on ne sait pas si la vérité réside dans la première ou dans la seconde des relations dont nous avons parlé : dans la relation prédicative ou dans la relation véridative.

“Or, la relation prédicative paraît indépendante dans une certaine mesure de la relation véridative. Et c'est cet aspect indépendant, cet aspect formel de la proposition que va étudier la logique formelle. On ne s'intéressera pas au fait que la craie est réellement blanche, mais à la forme de la proposition : la craie est blanche” (IPH, pp. 22-23).